


PEDENNOU BERR

Setu me, Aotrou
amañ dirazoh,
evid ober plijadur deoh.

Bennoz
ha
gloar deoh,
Salver
Jezuz !



Meuleudi deoh-c'hwi, Jezuz,
da veza deuet
da zeski deom pedi !

Aotrou Doue,
bihan on,
ha C'hwi 'zo braz,
med gouzoud a ran
e karit
ahanon !

Kinnig a ran deoh
Aotrou Doue,
an oll draou kaer
'm eus greet
hirio !



Pardon, Aotrou Doue !
Hirio n'am eus ket karet
gand va daouarn.
Roet am eus bahadou !
En em ganna 'm eus greet.

Aotrou Doue,
klask a ran
petra da ober
evid diskouez
e karan
va zad
ha va mamm.



Trist on emberr, Aotrou Doue.
...Ne labouran ket mad er skol.
...Etre tad ha mamm 'z eus bet tabut.
...Mammig 'zo klañv.
...Torret 'm eus va c'hoariell brava.
...Jakez, va mignon, 'neus dilezet ahanon.

C'hwi, Aotrou,
chomit truez
ouz an oll dud
trist !

